



Pellgargit an enrolladenn en linenn !  
WWW.TIDOUARALRE.COM



Geneviève Le Buhé  
a Vendon

# RIMADELLOÙ

## D'ar vugale

- A – Petra a hues kavet, Yannig ? Petra a hues kavet ?  
B – Un neizh pig ! Un neizh pig !... Bez 'oa daou ui e-barzh !  
A – Petra a oa en ui, Yannig ? Petra a oa en ui ?  
B – Ur pichon, ur pichon ! Daoulagad glas anezhañ\*.

\* *dezhañ*



## An daou zorn

Bez 'zo an dorn kleiz hag an hani dehoù.

An hini kleiz e vez lâret : Bizig bihan, Bizig bizoù, Bizig koran\*, Astell ar youd, Mac'hour al laoù !  
Hag an all e vez lâret : hennezh en deus gwelet ar bleiz, hennezh en deus-eñ redet; hennezh en deus-eñ tapet, hennezh en deus-eñ debret, hennezh n'en deus ket bet tamm, tamm tamm ebet !


\* *koran/konan = ar brasañ, ar mestr, ar penn*

## Da luskellat

Beli ! Belon ! An overenn en Toull Chikan.  
Piv a ya, piv nend a ket da fest an hoc'h da Langedig ?

### AR BIZIED

Klask liammañ an teir skeudenn doc'h ar biz a zegouezh doc'h pep unan anezhe !



Che tapet ar bleiz !